


KANAOUEN DEVOT

Var ar brezel a réar d'ar Pap a d'an Ijis catholic.



Er bloas 1848 , ar Pap a renkas tec'het eus a Rome. Ar France , galvet merc'h-ena an Ijis , a gassas eun arme da sicour ar Pap , ac abaoe an Impalaer Napoléon a zalc'h soudardet e Rome evit diouall an Tad sanctel.



Var don kimmiat ar soudart : *Va c'halon a zo frailhet ;*
pe var don : *Santez Mari , Mam Doue.*

1.

A beb amser an ifern en deus great ar brezel ,
D'a Jesus a d'he Ijis , d'ar Pap hon Tad sanctel :
Mes en amser ma Satan a ziskues he arrach ,
Goassoc'h eguet biscoas eneb ar Gristenach.

2.

Ar buguel en em revolt eneb he vam , he dad ,
Zo gant an oll disprijet , gant an oll casseat.
Mallos d'ar buguel ingrat , d'ar buguel didruez ,
A ro d'he dad ar maro evit caout he zanvez !

3.

Chetu eno , Christenien , petra velomp hirio :
Tud badezet , eur Roue catholic dré hano :
Poulset gant an drouc-speret , oc'h enim revolti ,
Eneb ar Pab Pi-Navet , o clask e zidroni.

4.

M'a teu-fe var an douar ar Rouanet christen ,
A roas quehall d'ar Pabet , evit en em souten .
Eun tamic rouantelez , gant an oll espernet ,
Souezet e lavarfent : N'eus muy a feiz er bed !

5.

Al laeron , ar forbanet a zo var ho meno ,
Tud honest , tud a feçon : Credet neb a garo !

Hiviziken ar muntrou ac ar forbanerez
A zo din a veuleudi , œuvrou a drugarez !

6.

Hennès eo an Aviel a laca e pratic ,
Ar re a guemer madou an Ilis catholic.
Ni gar ar Religion , a leveront hep mez !
Chetu forbanet honest a devot en ho iez !

7.

Ar Pap collet he stadou , a vezò eürustoc'h :
Nos-deis e c'hello pedi a beva e peoc'h.
Pe vont da redet broyou , e pep leach' estranjour !
Eürus m'a n'eo harluet evel eun torfetour !

8.

Ar Pap heb rouantelez , Pap bepret a vezò.
Chetu petra levereür , vit trompla tud hor bro.
Ar Pap heb rouantelez , evel guechall sant Per ,
A vo prizoniet , lazet , hep dale pell-amser !

9.

An hini zo he zever , zo carguet gant Doue ,
Da guelen a da repren an oll , pobl a roue ,
A ranko hiviziken , vel eur c'haskeur bara ,
Tremen dious he vugale evit gallout beva !

10.

Moundianet disourci , Bourc'hizien heb Creden ,
E passion hér Salver , guechall ar Juzevien ,
A reas eveldoc'h hirio , a lezas condaoni ,
Ho zad , ho madoberour , memes ingrateri !

11.

Pell zo an experianç e deus d'ar bobl desket
Petra eo promessaou a comsou forbanet.
Beva mad heb labourat , chetu petra glascont ,
A d'ar bobl a zent outo gant disprich e c'hoarzont !

12.

D'a c'hortos ma vint Mistri , ar forbanet divez !
D'ar Brincet , d'ar Rouanet , a voar ober al lez.
Prometti a reont ive d'ar bobl al *liberte* ,
Cargou , honor a danvez. Chui velo goudeze !

13.

Ar Pap eur vech discaret , piou vezo espernet ?
Ho tro a deuio ive , princet à rouanet :
An tan-goall eur vech croguet a ra cals a ravach ,
Ac ar Revolution ne glask nemet pillach !

14.

Lammit ar Religion , ar Pap , ar veleyen ,
N'och eus tuy en ho parrès , na sul nac oferen .
Pa goezot clan da vernel , evit och absolvi ,
N'a glaskit ket eur belec : marvit evel eur c'hy !

15.

Da beleac'h hiviziken , a zaïmp en hon izom ,
Da glask cuzul , sclerijen ? N'eus Pab ebet e Rome !
Hounnes eo da viana , reket Garibaldi .
Malheur d'ar Pap pa vezo ar mestr en Italie !

16.

Pa n'efe m'en deus Doue promettet assistanç ,
D'he Ilis var an douar , e colfemp esperanç .
Mes abred pe zivezad , ne deus netra surroc'h ,
Doue a roï d'he Ilis ar victor , ar peoc'h .

17.

M'ar deus tud fall , forbanet , an Ilis c'hoas hirio ,
E deus bugale fidel , e pep stad e peb bro :
Ne zeont ket oll d'ar brezel , mes oll eus ho madou ,
D'ar Pap e cassout sicour , vit difen he stadou .

18.

Tud yaouanc , paysantet , tud a lignez huel ,

A zifles bro a kerent , evit mont d'ar brezel,
Cals o deus deja collet ho buez er gombat.
Eürus da scuill ho goad , evit difen ho zad !

19.

Ho henvel oll a garfen ebars em c'hanaouen :
Ra vo scrivet ho hano e salon peb christen !
Henor d'an dud calonec maro evit ar feiz !
Henor d'ar re zo choumet , pa zistroïnt da Vreiz !

20.

Bennos d'an tadou christen , d'ar mamou calonec ?
O deus roet ho mipien , neb aoun rac an abec ,
Da zifen autorite Tad an oll gristenien !
Bennos Doue var-nezo ! leveromp da viken !

21.

D'ar Pap , d'hon Religion , dalc'homp mad , Bretounet ;
Heb Pap , heb Religion , ne deus urz-vad ebet.
An aotrou en be varner , ar paour en he lochen ,
An tyec , an artizan , n'eo deus nemet anken !

22.

Ma n'eo ket eun drouc aëres an Ilis catholic ,
Perac e ve divennet laës ar pinvidic ?
Lezen Doue a laval : e dra da beb hini ;
M'ar douc'h paour bezi honest , cassaït al laeronci .

1860.

